

# SALM 15

Tridal a ra

*Diwar un ton kembraeg*



Tri-da a ra va c'ha-lon e Dou - e ha va e - ne 'zo leun a joa!



## SALM 15

**Tridal a ra va c'halon e Doue, ha va ene 'zo leun a joa !**

Va gwarez a zo **ennoc'h**  
Mirit ac'hanon, O va **Doue**  
Lavaret 'meus d'an Aotrou, : « Va **Doue** »  
An Aotrou eo va lod, va c'halirad : C'hwi eo **gwarant** va lod.

Bennoz d'an aotrou a guzuill **ac'hanon** :  
Beteg en noz e kelenn ac'hanon em dia-**barz**.  
Lakaat a ran an Aotrou be-pred **dirazon**;  
A-zehou din emañ, hag ez **on** divrall.

Hag ez eo laouen va c'halon, hag e trid va **ene**,  
Ha va c'horv a ziskuiz e **peoc'h** :  
Ne zilezoc'h ket ac'hanon d'ar **maro**  
Ne lezoc'h ket ho mignon da weled ar **vreinadurez**.

Diskuiz a rin dit hent ar **vuhez**,  
Dirag ho tremm eur gwalc'h a **levenez**,  
Eun dudi a-zehou **deoc'h** be-pred.